



RECIT

CIRCONSTANCIET

*Var sujet ar maleuriou occasionet
gant ar Gurun, e T'aule, e Brest,
e Loc-Maria-Plabennec, e Pen-
cran, e Qemperle, e Scaer, hac
e qichen Montroulez, vardro fin
mis qerzu, er bloa 1853.*

Var ton : Deomp-ni oll brema, va Breudeur.

ITRON VARIA benignet,
Há c'houi, Jesus, Salver ar bed,
Plíjet m'oc'h invocin amán,
Rac hepdoc'h netra na ellán.

Ha c'houi ivez, Speret divin,
M'ho ped da rei selérgen d'án
Da ellout amá discléria

Maleuriou deus an horrupla.

Brema, leun eus a gonfiang

E madelez ar Brovidanç,

E zán da antren e matier :

M'ho ped d'am zelaou, breuder.

Ar zeitec eus a vis guenseur,
Certen e voe bras ar maleur

▲ erruas, siouas neuze,
▲ Allas ! ebars en bourg Taule.

Vardro ur peder-heur-anter,
E voa goual denyal an amzer,
Pa didarzas ul luheden

▲ ras ur spontus sclérigen.

Qerqent neuze ar gurunou-
▲ sclac gant aoun ar galonou ;
Rac qen bras e voa e fulor
Ma sponte an oll gant horror.

An oll a voa disesperet,
Hac o devez ractal serret
Gant ur soign vras o dorgjou,
Hac ivez o oll brenestou.

An dud qez neuze a stoue
Da implori sicour Doue :
Un dra horrupl e voa clêvet
Ar griadennou a leusqet.

Ar gounabrennon a traillas,
Hac ar gurunou a stracilas ;
Un ty a gargas a vogued
Hac a voa calz fieryus meurhed.

Demeus eno eo diredet
D'an tour, hac en devez teuzet
An orjalen a zon an heur ;
Mes, ô Doue, pebes maleur !

Diouc'h-tu d'an traon e tiruillas,
Hac er porchet ec'h autreas,

E lec'h ma tiscaras a blat
Daou den a voa o labouraf.

Unan so chommet er porchet,
Eguile en Ilis taulet,
Tost da dreid an autrou Cure,
Spouronet oll demeus a se.

An Autrou Lez voa d'ar c'houlse
Ebars en Ilis a Daule,
Tostic da basinier an tour,
Occupet da veniga'n dour,

Ar gurun a zo achapet
N'ouzer penos dious ar porchet,
Hep lezel merq en e c'houde
Nemet an daou maleurus-se.

An Autrou Cure voe neuze
Truhillet oll gant an traou-se,
Rac ne voa nemet hed daou bas
Demeus ar gurun pa guezas.

Sonjal a ras a dra certain
Penos e voa leusget un ten
En diabars eus an ilis,
Hac a rê un drous qen esqis.

Mes pa deu ennàn e-unan,
E tiredas prest ha buan
Ebars er porchet-da velet
Petra voa eno arruet.

Ha pa velas ar maleurus
Bars en ur stat qen truezus,
E voe treantet e galon
Gant horrol ha compassion.

An hini a voa bet taulet
En Ilis demeus ar porchet,
A voa var an douar pleguet
Vel ur c'hemener azect.

Ha gant spouron var zu an êe
E savc e zaouarn neuze,
En eur grial gen truezus :

« Misericord, Ô va Jesus !... »

« Va c'hôvessait, me ho ped,
« Autrou Lez, gent quittât ar bed ;
« Rac, allas ! me a vel brema
« Ne meus mui nemour da veva. »

An Autrou Lez er c'honsole,
Hac en assuri a glasge ;
Sicour a ras e gass buan
D'ar presbital da dal an tan.

Eno e voe examiniet
Ha souden neuze assuret
E voa yac'h mad, hac e tleye
Neuze trugarecat Doue.

Ar paour qez a reas souden
A greis e galon e beden,
D'er beza bet e gonservet
Hac ebars e yec'het lezet.

An autrou Lez a zistroas
D'an ilis neuze a hast vras,
Da rêi sicour da eguile,
Voa astennet var ar pave.

Ar C'hure dra inspiration
A c'halvas an autrou Person

A voa neuze eurusamant
Oc'h adori ar Sacramant.

Diredec a reas buen,
Allumet voe ur ciergen,
Hac absolvet ar maleurus,
Ebars en templ eus a Jesus.

« Caout a rejomp en ur stat trist
Neuze, hor breur en Jesus-Christ,
Hep tam anaoudeguez ebet;
Un druez bras voa e velet.

« Er sevel a rejomp neuze,
Ous en derc'hel en e goaze,
Ha ractal un hic a leuscas,
Ar c'homizou-mâ a lavaras :

« Pardon, pardon, ô va Doue!
« Bezit truez ous va ene. »
Ar peç a zisqueuze certen,
E verq a feiz a vouir gristen.

Ractal sicour a zo galvet,
Hac e vreg paour zo arrruet;
Mes pa velas he fried ger,
E couez diouc'h-tu en disesper.

An ozac'h diouc'h-tu zo douguet
Deus an ilis bars er véred,
Hac eno an ear grén timat
A seblaut douet d'er guellat.

Au autrou Person voa avis,
Ous en douguen dious an ilis,
Ma vije prest casset d'q dy,
Evit gallout guell e soigni.

En effet, ractal voe rentet,
 Rac tostic eo ous ar véred;
 Mes deposet var e vele,
 Na ro casj tam sin bue.

Ar Person a noùas ractal
 Ar maleurus-mâ var e dal,
 Hac a recco, tostic dezâ,
 E huanaden diveza.

Cri vije'r galon na vouelje
 Ebars en ty nep a vije,
 O clêvet ar c'hri, an anqen,
 Gant ar c'heuz d'ar paour qez christen.

Ar Pastor, dreist oll glac'haret,
 O velet en deveus collet
 Unan ous e zânvad guella,
 Na cess da hirvoud, da vouela.

Neuze e gorf voe bisitet,
 Da glasq ur blesseur benaqet;
 Unan hepqen en em gavas,
 Grêt gant ar pave, pa guezas.

E gredi rêt asphixiet,
 Ha prest ractal e voe casset
 Da Vontroulez ur messenger
 Da glasq ur medecin en qar.

An autrou Duqesn arruet
 En deveus an den divisqet,
 Hac ous en sellet tro var dro,
 E tislêry crenn e voa marò.

Mes vit ober mad e pep poent,
 Eo diou beder heur-varnuguent

Var ar vascaon eno miret,
Arauc ma zeo bet enterret.

D'ar sul da n'os neuze co bet
Rentet en douar benignet :

Ur bobl immanç a asiste
Bars'er ceremoni trist-sé.

Lavaromp oll, a greis calon,
Gant ar brassa devotion

Un *De profundis*, ur *Bater*
Bremâ evit hor mignon ger.

Requetomp ivez ons Doue,
M'en recevo en e asere :

Ha grac deomp oll, yaouanq ha c'ôs,
Da vont un deiz d'ar Barados.

C'houi, Fauleis, mignonet ger,
Ho pezo sonch pell a amzer

Demeus an dervez horrupl-mâ
P'ini a ra deomp oll crena.

Evidon, (eme an Autrou
A ziserif din-me ar c'hêlou),

Coulz ha va c'hamarad blesset
Ec'h ellomp assur lavaret :

Ma n'en domp qet bet pulluc'het
Gant ar gurun, pa zeo cuezet,

Ec'h ellomp crial a boez penn,
E zeo grac d'ar Mestr Souveren.

« En em soumettomp a galon
Ha gant ur guir devotion

E peb amzer d'e oll urzou :
Gloar bepret da Vestr an êvou. »

Abone'n anter a vis qerzu,
 Na glêver mui eus a bep tu
 Neuet comz eus a valeuriou
 C'hoarvezet dre ar gurunou.

Ar seltec eus ar memes mis,
 Selaouit, m'ho ped, va brois,
 En Hermitach parros Plourin,
 E fraillas ur vezen sapio.

Ac'hane red e bêr amzêr,
 Da dy ur paour qez labourer,
 Pehini a voz o repos

E tal an tan var ur banc clos.

Neuz'ec'h antre dre ar prenest
 E cambr an autrou contre-mest;
 Mes dre vertus Santez Barba
 N'erruas droug abet gantâ.

Tostic eno, ur meliner

A velas o saillad en êr
 Nomb' bras tamou eus ar vezen
 En form glao tan en e guichen.

Da nôs an nontec d'an aguent,
 Evit rei d'ec'h oll da eut
 Var dro an heur a anter-ue
 E zoat oll tranquil o repos.

Qerqent lubet ha curunou,
 A deu da 'sclac ar galonou
 Ebars er guær a Guimperle,
 Etre'n Isol hac an Elle.

Ar souldr a güez, hep dale jell,
 Var tour caer ilis Sant Mic'gel,

En eur difframma ur men bras
P'ini var un ty a guezas.

Ar men a dreuzas an ty oll,
Hac a yas neuze d'en em goll
Betec ar gambz an izella,
Hep na blessi den na laza.

Var hed daou droatat eo chommet
Ous ur guele eno placet ✓
E p'ini voa ar vam, an tad,
Hac ur buguelic cousget mad.

Dre c'hrac Santez Barba beniguet,
Nicun n'en deus bet droug abet.
Se a zo sur ur merq patant
Deus he frotection buissant.

Ar guruñ ebars en ilis,
En deus grêt maleuriou esqis,
Ar pez a deun deomp hirvoudou
Hac a ra deomp scuilla daelou.

Fraillet en deus an Auteriou,
Ha draillet an oll Daulennou;
Côvessional, qement so-
A voe brisillonet eno.

Goude heza oll distrujet,
E zeo ractal en em stlapet
Gant calz a fulor ha trous bras,
Var abatý côs Sante-Croas.

Er c'horf ty-se e zeo loget
Ar C'hure hac ar Sous-Prelet,
An Tribunal, ar Jandarmet;
Mes n'o devez bet droug ebet.

. Maleur a vije c'hoarvezet,
 Ma na vije eno placet
 Un discouruner beguet mad,
 Hac a deü oll da savetât.

Ilis ha tour Scaër voe ive
 Discaret oll d'an ampoent-se;
 Ur gambr a servich da ilis;
 O va Doue, pezh tra esqis!

En Brest, var ar güernierez,
 Eo cuezet ar gurun ivez,
 Hac en deveus bet grêt, sionas,
 Ur goal distruch ha domniach bras.

Var hed ul leo a Landerne
 En Pencran en deveus ive
 Grêt nombr bras a zestruction;
 En eur sonjal e zeus spouron.

Ractal ar gurun pront a ya
 Da zistruch tour Loc-Maria,
 Var hed ul leo a Blabennec,
 Er memes devez, ar seitec.

Boul beg an tour zo discaret,
 Hac ar garidou distrujet
 Hed e'hoec'h troatad a hep coste :
 Un dra estranch eo guelec se.

An tour en em gav soutenet
 Vel a ispill hac achantet
 Var beg diou goulonen huel
 ▲ brenestou an templ sautel.

En em striuca' ra gant arrach
 Diouc'h-tu var gambr an horolach;

Mes ar pez a rent estonet.

O coueza na ras trous ebet.

Mein dious an tour a ziframmas,

Hac hed cant troatad a stlapas ;

Bez' o d'oa ouspen mil livr bouez,

Ar pez a ro calz a soùez.

Ur burzud demeüs ar c'haera

Eo tour ilis Loc-Maria ;

Beza en deus hueldet.

Cant ugent troatad tremenet.

Mes, selaouit oll, me ho ped,

Un dra zo estranch bras meurbed :

En ilis Plabennec'a zo

Daou gayer hac en attesto.

E mil seiz cant pemp anter cant,

Ar seitec a guerzu justanant,

D'ar memes deiz ar gurunou

A ras nombr bras a valeuriou.

E Loc-Maria ar c'jiloc'h bras

Hac ar re vian e fraillas.

An ogrou caër voe bruzunet,

A gouste ouspen tri vil scoët.

Ar gurun ractal goude se

A scòas castel K'angoue,

Castel Penmarc'h a zistrujas ;

Mes, selaouit, me ho ped c'hoas.

Neuze za qerqent da saillat

Ous touriou Pencran, Plouescat,

Tour Plouvorn, tour Lanhouarne,

Tour Treflez a zistruch ive.

Trivac'h bloas ha tri-ugent zô
 Aboe'n distruch-se en hon bro;
 Hac ar pez so estonapla:
 Cazi d'ar memes heur e voa.

En em strincomp oll d'an daoulin
 Ous treid ar Vajeste divin,
 Da c'houlen dioutan pardon,
 Ha lavaromp a greiz calon:

O Jesus-Christ, Salver ar bed,
 Distroit onzomp, ni ho ped:
 Sellaouit hon oll hirvoudou,
 Hac exaucit hor pedennou.

C'houi, Santez Barba beniguet,
 Beillit varnomp-ni oll bepret:
 Hon diotiallit ous maleuriou
 Ha dreist oll ous ar gurunou.

AMEN.

E Montroulez, e ty LEDAN.